

**CANTIC SPIRITUEL**

EN ENOR

**DA SANT IAN BADEZOUR***Var un ton nevez.*

Jesus, Map d'an Tad Eternel,  
Salver ar bed universel,  
Roit din ho c'raç hac ho sicour  
Da goms a sant Ian Badezour.

Zachari hac Elizabeth  
Voa e dat hac e vam hanvet,  
D'an den voant exant a bep blam  
Pa voant da sant Ian tad ha mam.

Elizabeth a voa coz bras,  
Hep beza bet buguel biscoas,  
Mæs dre ur c'hraç dreist an natur  
E concevas he c'hrouadur.

E guir priedou e vevent,  
Humbl voant ha parfet evel sænt,  
Bemde e supliet Doue  
Ma roje deze bugale.

Pa voa Zachari en Ilis  
O offr da Zoue ar sacrific,  
E tigeças Doue an Tat  
Un Æl dezan gant quelou mat.

Ebars en tu deou d'an auter,  
E tisquennas ar messenger,  
Hac e laras da Zachari,  
Ema graç Doue en ho ty.

Exaucet eo bet dec'h ho peden,  
Doue a ro deoc'h ho coulen;  
Ho priet, quent nemeur ahan,  
En devo ur map hanvet Ian.

Ar map-ze a vo ur sant bras,  
Ur precursor d'ar Messias:  
Ar c'hraç en devo da velet,  
Nep a dle redimat ar bet.

Gabriel a zisparissas,  
Elizabeth a goncevas  
Ur map etre e daou goste,  
Precurseur d'an Autrou Doue.

Pa voa santez Elizabeth  
O touguen sant Ian biniguet,  
E teuas ar Verc'hes Vari  
Evit renta bisit deze.

Mari a zougue d'ar c'houlz-ze  
En e entraillou Map Doue:  
Deut voa abers ar Speret-Glan,  
Da lemel ar pec'her a boan.

P'en devoa Mari saludet  
He c'hiniter Elizabeth,  
Ha discæet dezi ur joa bras  
Daou miracl caër a c'hoarvezas.

Sant Ian e cof Elisabeth,  
Gant joa a commanças lamet  
Evel pa vise d'an daoulin  
Da saludi he Vestr divin.

Ouspen e voa sanctifiet,  
Delivret demeus ar pec'het,  
A ro deomp hon tad hac hor mam,  
Balamour d'ar pec'het Adam.

Piou ne gompreno quet a han  
An excellanç eus a sant Ian,  
Grêt voa gant Doue ur sant bras,  
Hac en ne voa quet ganet c'hoas.

Pebes joa da Elizabeth;  
Pa c'hanas he map biniguet:  
Cavet Jesus en e c'hichen,  
Redempteur an natur humen.

N'em eus nep doüet evit avanç  
E voa en Ev rejouissanç,  
Hac e cane an oll Ælez  
Da sant Ian canticou nevez.

Pa zeo Jesus roue a c'hloar  
Deut eus an Ev var an douar,  
A zisqueuse dre e bresanç  
Cals demeus a rejouissanç.

Zachari a voa mut rentet  
Balamour m'en devoa douctet  
Da gomzou an Æl Gabriel  
Messenger an Tad Eternel.

Mæs sant Ian pa zeo bet ganet  
Ar goms d'e dat en deveus roet:  
Rac cheta aman e gomzou  
Ian emezan eo e hano.

Entre ar bugale malet  
So biscoas gant groaguez ganet  
N'en deus quet bet hepquen unan  
Brassoc'h evit ma zeo sant Ian.

Jesus-Christ pa voa var ar bet  
Eo en deveus e lavaret,  
Me gred, ho Salver pa gomzo  
Avezo credet hep testo.

Sant Ian biscoas ne reas pec'het,  
Ha ras pinijen bras bepret;  
Paourte, poan, humilite,  
N'en deus bet quen en e vuhe.

N'en devoa quen evit dillat  
Nemet croc'hennic eun danvat  
E diliciussa cheriou  
Voa dour scler ha griziu lousou.

E vele voa an douar yen,  
E dy er meas, e bluec men,  
E dapis hac e lincellou  
Ne voant nemet spoe ha delliou.

E compagnez al loenet,  
Bleizi, moc'h guez ha leonet,  
E jardinou d'en em bourmen,  
Coajou, drez, spern, dour a bouillen.

Concluomp eta, christenien,  
Eo nesser bras ar binigen,  
Pa zeo eun den quen innoçant  
A souffr quement all a dourmant.

Sant Ian en desert er guis-ze  
Ne re nemet pidi Doue,  
Ha gortos gant eun desir bras  
Donediguez ar Messias.

Mæs pa voa arru an termen  
Da brena an natur humen,  
E quittas sant Ian ar c'hoajou  
Evit mont da sermon dre'r vro.

Da laret dan dut disordren  
E voa ret ober pinigen,  
Evit prepari an henchou  
Da ziguemeret an Autrou.

Ar brut mat demeus e vuhe,  
E squiant e autorite,  
A re d'an dut a bep canton  
Donet d'e glevet o sarmon.

E sellou a voa quer charmant,  
Quen douc e goms, quen ravissant,  
Ma songent oll bian ha bras  
Penaus voa hen ar Messias.

Bete memes ar Jusevien  
A zeputas o beleyen,  
Evit mont da c'houlenn outan  
Hac ar c'hristen a rer anezan ?

Mæs en en devez respontet  
Ne voa na Christ, nac ur Prophet,  
Nemet ur vouez en ur dremen  
O laret ober pinigen.

Sant Ian eleac'h ma tremene  
Ouspen sarmon e vadeze ;  
Gant e gomzou e yent contant  
Da sench a caout badiziant.

Pa voa o sarmon evellen  
E quichen bord rivier Jourdren,  
E teuas Jesus e unan  
Da veza badezet gant Ian.

Sant Ian en istant me'r guelas  
Ous e anaout en discuesas,  
Heman, emezan, eo an oan  
A lammo ar pec'her a boan.

En zo bet deomp prometet  
Gant quement eus a Prophetet :  
Chetu aman an oan Doue :  
Hor Mæstr, hor C'hrouer, hon Roue.

Piou a gomprenas biscoas  
Humilite ar Messias,  
Pa bligeas gantan er Jourdren,  
Monet e renq ar bec'herien.

Da effaci ar pec'hejou  
E ve gret ar badianchou,  
Mæs Jesus, hac en innoçant,  
A recevas ar badiziant.

Chetu aman traou surprenant  
Hac a ra din coll ar parlant,  
Guelet Jesus humiliet  
Dirac nep en devoa crouet.

Jesus hor Mæstr, roue a c'hloar,  
A so prosternet d'an douar ;  
Mæs Ian o rei ar badiziant,  
So enoret evel ur sant.

Jesus a so voar e zaoulin,  
Hac en ur personiach divin.  
Jesus a so e plaç ar pec'her,  
Ha Ian so e plaç hor Salver.

C'hui sant Ian p'ho poe an enor  
Da badein hon Redemptor,  
A remarquas a cuc'h e benn  
Ar Speret-Santel o tisquenn.

C'hui glevas an Tad Eternel,  
O ansao eno e Vuguel :  
Henez eo ma Map, emezan,  
Ma fligeadur a so ennan.

Sant Ian p'en devoa badezet  
Jesus hor Salver binniguet,  
A yas da balæs Herodes,  
D'e vlam eus e aoultries.

Mæs ar roue Herodias,  
Ous sant Ian en em goleras,  
Hac a ras dre suasion  
Lacat anezan er prison.

Pa voa ar roue un devez  
O leina e compagnez,  
E teuas merc'h ar plac'h flamant  
Da ober un dans dirazan.

Ar Roue neuse a laras  
D'ar Verc'h-ze da Herodias,  
Goulen un dra benac outan  
Hac e di vize anezan.

Gant he mam ar plac'h quelennet  
Penn Sant Ian e deus goulennet ;  
Troc'het voe er prison e benn,  
Ha roet dezi he golen.

Sant Ian breman ez oc'h er gloar  
Goude ho poan var an douar :  
Hoc'h assistanç a c'houlennomp,  
Ho pezet sonch eus a c'hanomp.

Hor preservit ous teir goalen,  
Bresel, querez hac ar vocen,  
Dre ho pedennou deiz ha nos  
Hor c'honduet d'ar Barados.